




Bleun-Brug

Niv. 55-56 (Mensuel)

GENVER - C'HOUEVRER 1953

Ha paet eo ganeoc'h ho koumanant 1952 ?

An darn vrasa eus hon lennerien a zo echu o c'houmanant. O fed start a reomp eta da bae o c'houmanant nevez raktal, pe da lavaret d'eomp ne gemerint mui ar gelaouenn.

Koumanant bloaz : 500 lur.

Koumanant a enor : 600 lur.

Madoberour : 1.000 lur.

Kas an arc'hant da : V. SEITE, Bleun-Brug, 65, rue Y.-Collet, Brest.
C.C.P. 544.22 Nantes, hag ar skridou da : M. l'abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan (Finistère).

TAOLENN

Bloavezh mat	1
Ar Vretoned e kaonv (maro Paotr Treoude)	2
Me zo ganet e Plouguerne (Kanaouenn)	5
Touseg Feunteun Glanvez	6
Elefant an termaji	7
Bugale Vreiz o prezeg ar Feiz dre ar bed	9
Morlarjez ha Koraiz	10
Paotred ar sukr hag an divroa e Breiz	11
Kantik da Zant Maodez	13
Ar Vretoned hag ar brezoneg	14
Lonka ar c'haz	15
Korn al liziri	16
Keleier	17



133669

BLOAVEZ MAT

GOUELIOU Nedeleg hag ar bloaz nevez, n'int bet nemet eun tammig ehan war hent ar stourmad m'eo hor buhez.

Eur bloaz all a zo krog adarre da drei.

Dre gaer pe dre heg, omp bet sammet gantan, a dro-vriad, ha cha-chet 'vel gant dent eur rod, war-du ar blanedenn merket d'eomp gant Doue.

Dindan lezenn al labour hag ar boan, emaeomp, e gwirionez, en hent war-du eun Nedeleg all, eun Nedeleg padus, an hini a c'halvomp bemdez, pa lavaromp ar bedenn, bet desket d'eomp gant Hor Salver : « **Ho rouantelez deuet d'eomp** ».

Ar rouantelez-se, omp karget, pep hini ac'hanomp, da ziazeza dou-noc'h, en hor c'hreiz, karget da skigna en-dro d'eomp, n'eo ket eun abadenn blijadur, pell diouz eno... Eur stourmad kalet eo enep sperejou an draug, eun hadenn a dle sevel en eur park leun a zraog, eun tamm goell a dle gounit, a-nebeudou, tro-wardro an toaz a-bez. Eul labour start eta, eul labour hir, dreist galloud an den, a c'houlenn digantan nerz kalon, feiz, pasianted ha karantez...

Ar pezh a lavaromp eus rouantelez Doue, eus tachenn ar feiz, a zo gwir-bater ive eus tachenn hor menozioù, eus tachenn bra hor c'havel.

N'eo ket en eur bloaz, na daou, e vez diforvilet spered eur bobl, ha laket da garout a-nevez ar pezh a vez bet klasket diskar dirazon epad kant vloaz.

Ar gredenn hor beus eman ganeomp ar wirionez hag ar gwir.

N'omp ket tud e vrezel, ne vennomp ket hada freuz nak ober gaou ouz den.

Klask a reomp hepken, gant holl youl hor c'halon, mirout da Vreiz, hor c'hornig bro, ar pezh he deus graet, a beb amzer, he braster hag he gened : he feiz, he yez ha pinvidigezioù he ouenn.

En dachenn ma labouromp warni, n'omp ket bugale diboell ha berrwelet, na welont dirazo dreañ-spenn ebet. N'omp ket, kennebeut, krenerien fallgalonet, a lavar, dre ma z'eont : n'eus mui netra da ober.

Fin miz Genver en deus digaset d'eomp gouel an abostol bras Sant Paol. An denig-se, dirak ar bed-holl, roet d'ezan da dachenn labour, dirak enebourien flemmus ha kounnaret, en deus dalc'het penn, a zo chomet start en e-sav, n'eo ket gant e nerz e-unan, met gant sikour eun all, a rae d'ezan beza krenv, e kreiz e sempladurez : « **Gant gras Doue, emezan, ez oun ar pezh ma z'oun** ».

Ra vezo ive, e penn kenta ar bloaz nevez-man, war gras Doue ec'h harpemp hol labourioù eyit Doue hag ar vro.

« Hon Doue a garimp
Hor yez a virimp. »

L. B.



AR VRETONED E KAONV

I

PEBEZ kelou glac'harus ! Maro Paotr Treouere. Tremenet eo e Kastell-Paol, en ti repu ar veleien, hanter-noz gouel Nedeleg. An holl, koulz lavaret, a ouie e oa eur beleg anezan. *Augustin Conq* oa e ano.

Ganet oa bet e Trehouere (Trev-gorre) e parrez Plougin (Plouguin, e galleg) e goueled Leon, tost da Witalmeze.

D'ar 15 a viz Here 1874, deiz e c'hanedigez, e voe badezet, en iliz parrez, gant an ao. *Treguer*, person. Mab oa da C'hlaoda ha da Vari Fourn, Gabriel Conq ha Marijann Morel eo a zougas Aogustin war ar maen-font.

Deut d'ezan an oad da veza skoliet, ar paotrig a voe kaset da skol nevez ar Frered, e *Lokournan*.

Ne vanko, tro ebet, da zigas da zonj edo kenta skoliad, eus ar skol-se, aet da veleg.

E skolaj Lesneven eo am eus hen anavezet da genta. Di oa digaset da Vestr-studi, araok beza beleget.

Roet am eus tro d'ezan, ouspenn eur wech, d'am skandalat, met skandalet flour avat, rak plijout a rae d'in ar c'han hag ar muzig, ha d'ezan ive.

Kerkent ha beleget, e 1898, an ao. Conq a voe anvet da gure e Kastell. Chom a ray eno epad 22 vloaz — ha n'eo ket bloaveziou ehan, m'he! lavar d'eoc'h. Ograouer oa, savet en deus ha ren a rae eur strollad muzisianed, en eun doare dispar. Epad pell amzer, eo bet e penn ar patronaj. Ar garg en doa ive eus kurusted ar barrez hag en e amzer, ar c'han en iliz-veur a oa eun dudi da glevet.

Lorc'h a oa e Paotr Treouere da veza skoliet war ar c'han ha da veza hent-chet goudeze *Emile Cuffe*, nevez aet ive, siouaz, d'an anaon. Rouez eo ar Vretoned n'o deus ket klevet mouez nerzus Kaner Leon, o tistaga *Va Zi bihan* ha kanaouennou all savet gant e vestr.

Goude beza bet 10 vloaz (1920-1930) person Locquenole, tost da Vontroulez, an ao. Conq a voe tronet person Plouneour-Trez, e 1930, da viz Kerzu.

En e vleud en em gavas eno, etouez kristenien ha bretoned eus an dibab. Gant keuz bras e rankas rei e zilez da viz Genver, warlene, abalamour d'e yec'hed. Anaout a rae e glenved ha lavaret a rae ne welje ket ar bloaz nevez. Ne fazias ket. Kanet en doa : « *Dudius eo ar mab dinam* » :

« *Astenn ho rouantelezh
A vezo va lezenn
Mervel en ho karantez
Errez va c'hurunenn.* »

Ar Mabig Jezuz en deus e glevet.

Setu deut en-dro nozvez kaer Nedeleg ha Paotr Treouere a gimidias diouz douar santel Breiz.

D'e dud a lenve o sellet outan, en e boaniou, hag o sonjal edo war e huana-dou diweza, e lavaras, laouen : « Karet em bije kana d'eoc'h eur wech all. Met oun ket gouest ken. »

E gorf a zo bet beziet e-harz kalvar bered Plougin, demdost da iliz e vadiziant.

II

KENAVO PAOTR TREOURE

BEZ e karfen gellout ober, e brezoneg, kerkoulz prezegenn a veuleudi d'an ao. Conq eget an hini graet, e galleg avat, dirak e arched, e iliz Plougin, gant an ao. *Cadiou*, vikel vras. Meulet eo bet gantan, en eun doare kaer meur-bet, ar beleg hag ar barz brudet, m'eo bet an ao. Conq.

Kement all a veuleudi a zo bet roet d'ezan ive e Kastell, en iliz-veur gant an ao. *Cotten*, pennrener Kloerdi Kemper. Pevar ugent beleg a oa eno, ha tri ugent bennak e Plougin, o c'houlenn digant an Elez kas ganto d'ar Baradoz ene an hini, a oa bet e vuhez a-bez, evel eur ganaouenn d'e Zoue ha da vro e gavel.

Kalonou ar Vretoned a zo e kaoñv. Ma ne ziskouezas ket lidou an Iliz, na dre ar c'han na dre an agraou, o doa kollet eur barz kristen ha breizad, eus an dibab, brudeta hini a zo bet ; hag e vezo bet an diweza, ma kendalc'h ar Vretoned da heulia hent an divroaddelez, nak a bed eus e genvroiz o deus keuz d'ezan hag a bedo evit peoc'h e ene. Goulenn a raint digantan, harpet ma vezo gant Y.-V. Perrot, Gwennael Cozanet, an ao. Carda hag all... pedi an Aotrou Doue da deurel war Breiz eur zell a druez hag a garantez.

Ne vezo ket gwelet ken Paotr Treouere o kana e ganaouennou hag o tistaga e rimadellou. Pebez ebat a veze ! Klevet e vezo avat e vouez, rak war pladen-nou int bet engravet ha keit ha ma pado ar Radio brezonek, fizians hon eus e vezo roet d'eomp da glevet heb ar bare, fizians ive e vezo kizellet eur ger bennak, e brezoneg, war e vaen-bez. E genvroiz diwezatoc'h e ouezo ouz e lenn ez eus bet ganet, e parrez Plougin eun den brudet... ma ouezont c'hoaz, da vihana, komz ha lenn yez o zadou.

III

EUR ZELLIG WAR LABOURIOU PAOTR TREOURE

KANTIKOU, kanaouennou, rimadellou, fablennoù, setu danvez e oberou. Kerse bras eo n'en dije ket Paotr Treouere laketa e ijin hag e spered goapaüs da zevel peziou c'hoari. Ker mat all ec'h anaveze doareou ar c'halonou.

E kenver yez e skridou, n'ez eus bet barz ebet oc'h ober gant ar brezoneg evel dan. Brezoneg Paotr Treouere a zo pinvidik, yac'h, flour, poblel. Direbech kaer e kenver ar werzoniezh. Muziker oa, anet eo. Ar c'homzou hag an tonioù a vale kompez.

Digorit levr kantikou eskopti Kemper. Kaout a reer, en o zouez, daouzek kantik, deut eus pluenn an ao. Conq : *Benedicite* — *Dudius eo ar Mab dinam* — *Sklerijenn gaer lugernus* — *Gloar ha mil bennoz* — *Aotrou Sant Per* — *Savomp hor mouez* — *Kanomp, kanomp da virviken* — *Setu deut en-dro nozvez kaer Nedeleg* — *Aleaz ar baradoz a ganas Noël* — *Salver madelezes*.

Daouzek a zo gant e ano war leor an tonioù. O veza m'am eus roet an dourn da glask aozerien hor c'hantikou, eun enklask diaes, a c'hellit kredi, fazia am eus graet a-wechou. Daou gantig all eta a zo da lakaat d'ezo ano an ao. Conq : *Ar skol gristen ha Sant Per*, patron ar barrez. Hen e-unan eo am difazias. Anoiou an ao. Guillou hag an ao. Horellou a oa bet laketa d'ezo.

Kantikou all, a zousennou, a zo bet skignet gantan, e n'ouzon ket e ped kelaouenn ha kazetenn ha war folennou paper distag.

E diwez pep hini, e kaver peurlieza al lizerennou-man : A. C. pe P. Tr. (Aogustin Conk — Paotr Treouere). Lod koulskoude a zo diberc'henn ha setu perak e ve diaes lavaret ped a zo anezó holl, diaesoc'h c'hoaz o rolla difazi : eun hanterkant bennak, a gredan, rak ouspenn tregont a anavezan.

Pardon, chapel, Sant hep kantig, pe d'ezo eur c'hantig koz, deut da veza dizereat, goulennet e veze eur c'hantig digant an ao. Conq.

Kement all, pa veze kleier nevez da veza beniget, eur gouel nevez da veza aozet, eun oferenn genta, eun eured aour. O ingala a rae er C'hourrier dreist-holl. Lod all a zo e strollad kantikou ar Salet, re Lanneur. E keit ha m'edo an ao. Conq kure Kastell, epad ar brezel bras, e kase kelou eus ar barrez da soudarded ha martoloded, dre eur gazetennig : *Le Canard*. N'ouzon ket ha moulet e veze kanaouennou warni. War *Feiz ha Breiz* avat hag ar *C'hourrier* o c'haver stank hag ive war *Gannadig Plouneour*.

Kalz anezo a zo bet moulet, e-barz leoriou *Soniou Feiz ha Breiz*, eur bern all, e-barz *Barzas ha soniou* Paotr Treoure hag e *Mojennou ha Soniou*. Soniou Paotr Treoure a zo graet ganto tro ar bed, ha n'eo ket warc'hoaz, emichans, ec'h ehano Bretoned, forz e pe gorn ar bed e vefent, da « laouenaat o fenn gant e ganaouennou kei lirin, gant distaga Yann ar Paotr mat, ar Mear hag ar c'hleier... hag all.

E vojennou a gaver holl, a gredan, en e levr, pe en Almanag ar Breizad 1942. Ne gredan ket avat e v'eo bet moulet ar c'hanaouennou a gane etre ar Benedicite hag an Agimus, pa veze o preja gant e genseurte beleien, oc'h enori unan bennak anezo hag o lake da ober kovadou c'hoarzin.

Ped ha ped eus fablennou « La Fontaine » a zo bet laketa gantan, e brezoneg ! N'em eus ket ar gont anezo. Lod, evel *Combeau, Gwennael* o deus troet ive fablennou o chom tost eus ar patrom. Paotr Treoure a lake an danvez da veza diouz temz-spered bretoned diwar ar miz.

Evel ma lavar an *ao. Falc'hun* er rak-skrid al levr *Mojennou* : « E gwirionez, troet n'eo ket ar ger reiz ; adaozet a ve gwelloc'h ha galies kavadennoù Paotr Treoure a dalv re Yann ar Feunteun. » « Hogen, emezan c'hoaz, d'in mie e plij muioc'h ar pezh a zo bet skrivet gant Paotr Treoure eus e benn e unan... Korrida Bilbao, Yann ar Paotr mat, Pagan Kerlouan... saourusoc'h brezoneg, taolennou farsus, skeudennet gant muioc'h a vuhez n'em eus kavet biskoaz. »

An *ao. Falc'hun* a gloze rak-skrid ar *Mojennou* ha *soniou* gant ar gerioù-man. « Aotrou Cong, na lezit ket ho pluenn da vergla ; n'hon eus ket par d'ez. »

Senti en deus graet. Allas ! an *Ao. Doue* a gawe en doa graet implij a-walc'h hag implij mat, war an douar, eus an donezonou kaer en doa roet d'ezan. Enoret en doa an *ao. Cong* dreizo e *Feiz* hag e vro.

Ra vezo sikouret gant pedennou ar re o deus e garet hag ar re a zalc'h c'hoaz uhel banniel Breiz, en desped d'an avel foll, da gaout repu er Baradoz.

*Bretoned savomp hor c'halonou
Ha touomp e talc'himp atao
Da vale war roudou hon tadou
Keit ha ma'z'aj ar bed endro.*

L. LOK.



— An neb ne ra netra
Na koll na gounit ne ra.

— A greiz kalon e tleez poania :
An Nefiv a zeulo d'az skoazia.

— Pa vezer savet uhela
Neuze e vez al lamm brasa.

— Ar mad kuzet eo ar gwella :
Eul lagad 'zo a wei pep tra.

— Ouz soro'hel leun a avel,
Den re vrudet a zo heñvel.

ME ZO GANET E PLOUGUERNE

I

Me zo ganet e Breiz-Izel
Harp ouz ar mor
E Plouguerne, e Bro Arvor
Dirak an aod, kreiz an avel
En eun tiig bihan hep goudor
Me zo ganet e Breiz-Izel
Bro an avel.

II

Me zo ganet e Plouguerne
E-kreiz ar bloaz
Duhont e penn an douar bras
Ar mor, er c'herreg, a groze,
Evned a gane en oabl glaz.
Me zo ganet e Plouguerne,
Da c'houlou de.

III

Me a vevo e Plouguerne
Euruz bepred
En ziig bihanig benniget
E tanvin, sioul, douster an de
Pell ouz trouz ha safar ar bed
Me a vevo e Plouguerne,
Peoc'h em ene.

IV

Me a zalc'ho da Blouguerne,
Da Vreiz-Izel
Enep hor gwir safe brezel
A dreuz ar bed kroufe arne,
E talc'hin start d'he feiz santel
Me a zalc'ho da Blouguerne
Bro va c'havel.

V

Me da gano, va bro garet,
Hed va buhez.
Peb labousig en deus e vouez
Da gana flour kaerder ar bed
Va hini d'in va karantez.
Me da gano, va bro garet
Gant levnezh.

Guisseny 1952.

An daou zarvoudig-mañ hon eus tennet, evit hol lennerien, eus al levr *efivorennou emañ hor mignon Yeun ar Gow o skriva hag a vo anvet gantañ « E skeud tour bras Sant Jermen »*.

Setu ar pezh a c'hoarvezas gant tad an oberour pa ne oa c'hoaz nemet eur c'hrennardig :

TOUSEG FEUNTEUN GLANVEZ

...Eur wechad, war am eus bet klevet gantan, edod o torna e ti e vamm. Tomm-ruz e oa an amzer hag an dornerien, eur c'houeh a zek pe zaouzek den war gorf o roched, gleb gant ar c'houezenn a zivere diouto, a oa da vat o lopa war al leurriad. Kana ha tregerni a ree al leur gant an diou renkennad freilhoul a oa, an eil dirak eben, o skei diouz tro hag oc'h ober an drap. Hogen dont a reas sec'hed d'an dornerien hag e c'houlennjont dour da eva.

Ne oa ket figus an dud d'ar mare-se ha ne vezent ket o klask kaout sistr etre ar prejou. Digaset e voe d'ezo dour puñs troc'het gant eur beradig gwinegr, evel ma veze grêt ivez d'ar falc'herien pa vezent o troc'ha foenn dindan an heol bero. Hogen ken tomm ha ken arneuek e oa an amzer an deiz-se, ma voe kavet klouar an evaj ha ma ne dorras ket o sec'hed d'an dornerien. Setu ma lavaras unan anezo en divije evet, gant plijadur, eur banne dour eus Feunteun Glanvez.

Brudet e oa Feunteun Glanvez e Pleiben hag anavezet gant kement den eus ar barrez, dreist-holl gant tud ar vourc'h. N'emañ ket tost da chapel ebet ha n'eo gouestlet da sant na da santez ebet kennebeut. Gant mein rous pe mein-benerez bolzet eo grêt ha tenna a ra da feunteunioù hor chapelioù koz. War-dro c'houec'h pe seiz munud emañ-hi diouz ar vourc'h, en eur stankenn vihan, e-kichen eur prad striz ato glas, hag izeloc'h eget an hent bras a ya da Vras-parz, disheoliet ha gwasket gant ar bodennadou skao hag ar gwez eolec'h a oa neuze a-dreñv he c'hein. N'eo ket bet gwelet morse o vont da zisec'h, zoken dre ar sec'h vras hag ar bloaveziou tomm. Ken sklêr ha lagad an naer e vez atô an dour enni, klouarik diouz ar goañv ha fresk ha distan e-pad an hañv, e-touez ar glandour glas, re-bar d'ar c'haera seiz ha voulouz, a sav eus ar goueled anezi da wagenna da heul kasenn an eien. Ne vo kavet e nep lec'h, hervez Pleibeniz, dour-all ebet ken yac'hus hag hini Glanvez ha gwir e tle beza kement-se rak « ar vourc'hizien », evel ma ra an dud diwar ar mêz eus re ar vourc'h, ne event neuze, ha pell diwezatoch, nemet eus an dour-se koulz lavarout.

Kaset e voe, eta, Yeunig ar Gow, va zad, da Feunteun Glanvez da gerc'hat eur pic'herad dour fresk d'an dornerien. Gouc'hemennet e voe d'ezañ ober buan e dro ha difennet outañ c'hoar-ha da c'henaouegi a-hed an hent. Siouaz ! gouzout a rit petra eo eur c'hrouadur eiz pe nao bloaz.

Kerzout a reas ar pôtrig difrê a-walc'h trezek ar feunteun, met, pa voe diskennet betek enni, e chomas alvaonet da sellout ouz eun dra ha n'en devoa ket bet gwelet biskoaz. Tost d'ar feunteun, war ar sec'h, e oa eun naer vras o tislugerni, gant he daoulagad re-bar da ziou c'hlaouenn-dan, ouz eur c'hrenn touseg hag en em gave war-hed eur gammed pe ziou diouti. Chugudet ha pladet ouz an douar e oa ar paour-kêz amprevan, met, bep eun tammig, e kerze war-rôk en euz dermal, evel chachet en desped d'ezañ trezek an naer gant nerz iskis ha diaoulek he daoulagad lemm. Ha setu, en eun tâl-kont, an touseg o lamm e genou an naer, digor-frank ha ken bras ha ken ledan a-benn neuze ma kouezas ar sabatur war ar pôtrig. Lonket e voe an touseg gant an naer ha diskenn a reas don en he bouzellou e-lec'h ma reas eur mell c'houezad e-kreiz he c'horf.

Hogen gant ar c'hofad he devoa grêt, ne oa ket gouest an naer da finval ha Yeunig ar Gow, disaouzanet, a reas ar soñj d'he laza. Gant ar vein e yeas d'ezi ha kement a vec'h a reas an naer a-rôk mervel ma rankas dislonka an touseg. Hemañ a oa beo-buhezek c'hoaz ha, gant al levenez hag ar blijadur a

oa ennañ da veza bet tennet eus al lec'h divalo ma oa bet klozet, e tañsas hag e lammas kement ma kouezas war e benn er feunteun e-lec'h ma reas eur c'hrograd neu a-barz en em ripa kuit da guzat en eun toull bennak.

Allas ! n'edo ket ar pôtr Yeunig war-c'hed eus eur seurt tra. Penôs bremañ kredi kas dour eur ar feunteun-se d'an dornerien pa oa bet enni eun amprevan ken binimus hag eun touseg dislonket gant eun naer ? Ken buan e vije gouest an evaj-se d'o lakaat da gleñvel ha da vervel goude marteze. Setu ma oa lakeet diès spered ar bugel o klask gouzout petra a vije ar gwella d'ober : distrei d'ar gêr gant eur pic'her leun pe unan goullo. Ya ! met petra a lavarje an dud-se a oa du-ze war al leur o tideota gant ar sec'hed ma n'en divije netra da rei d'ezo da eva ?

Neuze e teuas eur soñj d'ezañ : ma chomje da c'hortoz pell a-walc'h e yaje kuit ar binim da heul an dour a rede eus ar feunteun. Ya ! met, gwasa pezh a oa, ne oa ket evit chom eno da goll e amzer e-keit ha m'edo ar re-all ouz e c'hedal d'ober e dro. Daoust da ze e lakeas eun azez war eur mên hag e krogas, ankeniet ha gwasket e galon, da brederia war ar gwall-dôl a oa c'hoarvezet gantañ. « Oï ! » emezañ outañ e-unan, « ma karjen beza leuniet va ficher a-barz laza an amprevan lous-se ! » Hogen « ar c'heuz ne zeu morse a-rôk, met atô war-lerc'h », evel ma vez lavaret amañ.

Gant reor ar pic'her e strabouilhaas an dour er feunteun evit ma redje buanoc'h er-mêz ha ma yaje binim an touseg d'he heul. Neuze, o welout e oa an dour-ze ken sklêr ha ken lintrus hag ar geiz-mintin dindan heol benniget an Aotrou Doue, e leunias e bicher ha, teñval e dal, gwall-sammet e goustiañs ha mall bras warnañ, e kerzas gantañ d'ar gêr.

P'en em gavas war al leur, ruz e glipenn hag ar c'houezenn o pizenna war e dal, e savas an hop warnañ. Ne gleva a bep tu nemet komzou dizoare : « He ! mec'hieg, p'lec'h oc'h chomet gant ho tour ? N'eo ket da c'hoari e oac'h kaset ! Deuit amañ ma vo tennet korennig d'eooc'h ! Gortozit ma vezoe'h frêet ! 'Peus ket truez ouz an dud paour a zo amañ stag o zeod ouz o staon ? D'ho kwele e tlefec'h beza kaset, gant eun tamm bara sec'h ! Kac'h-alañig ! Mez-e-welet ! Yeunig bonton stên a vez kavet mat pa ne vez den ! C'houi eo ar gwella war-lerc'h Loig ha Loig a oa ar falla nemet unan ! »

Moarvat n'eo ket gant droug bras e voe lavaret d'ar c'hrennard an traoù dizercat-se, met c'hoant a oa da rei d'ezañ eur gentel evit ma vije gwelloc'h da senti eur wech-all.

Yeunig ar Gow n'en em gave ket kalz, en e aes e c'hellit kredi. E-keit ha m'edo an hop warnañ e klaskas lavarout d'an dornerien petra a oa bet c'hoarvezet. Hogen a-rôk ma c'hellas o lakaat d'e selaou, e oa bet lonket ganto ar pic'herad dour feunteun...

ELEFANT AN TERMAJI

Pa c'helle kaout hed e c'har, e yee ar pôtrig da c'hoari, da glas neizou ha da fleisat gant ar voused-all eveltañ, hag ivez da c'henaouegi dirak ar marmouzh war al leurgêr vras.

Eun devez ec'h en em gavas e bourc'h Pleiben eul lostennad gweturioù ha kirri-termaji stlejet gant ezen, muled ha kezek a bep liou hag a bep ment. Er re genta e oa krugelladou gwazed, m'erc'hed ha bugale du-pod o bleo hag o daoulagad ha rous o c'hroc'hen, gwisket dizoare gant bep seurt dilhad iskis na oant ket heñvel ouz re an dud-all. Er c'hirri, klozet mat gant barinier houarn ha goloet gant peziou leien godronet, e klêved loened gouez o c'hourdrouz gant mouezioù gros hag o tabac'hat. Ar re-mañ, moarvat, a oa leoned, tigred, leuparded hag anevaled-all eus ar broioù tomm.

War benn a-rôk hiniennou eus ar gweturioù e oa marmouzien, azezet e-kichen tud an termaji, oc'h ober geizou ha begou pe o krignat eur frouezenn bennak ha, da heul al lostennad, e kerze tri elefant bras, eur bleiner war ehok pep hini anezo.

Sabaturek-mik e chomas moused boure'h Pleiben dirak ar gurioziteou-se. An elefanted, dreist-holl, a gavent iskis-tre rak ne c'hellent ket kredi e oa loened ken bras ha ken divalo war an douar.

E gwirionez, souezus e oa an anevaled-mañ da welout gant o diskouarn bras ha plat, kement ha pilligou, hag ar melladou skilfou kamm a zeue er-mêz eus o genou, unan a bep tu d'ar fri hir, re-bar d'eur gorzenn, a fistoule en-istribilh ouz o fenn. Didrouz e kerzent en o c'hroc'hen kalet ha gwall-frank d'o c'horf, e-giz ma vije bet ganto, 'en dro d'o feskennou, pep a vragou risket ha re-vras.

Herpel a reas an termaji war al leurgêr vras hag e voe disternet al loened a oa o stleja ar gweturioù hag ar c'hirri ha savet, gant gwernioù hir ha n'ouzon pet tamm lien, eur mell teltenn ront ha beget lemm.

E-pad an amzer-se e yeas lod eus ar bôtred-termaji da glask lojeiz d'an elefanted. Marchosi kezek-servij ar gouarnamant, war hent Brasparz, a oa goullou d'an ampoent hag eno e voe kavet repu d'ezo o-zri. Prenestrou peuz-frank a oa war ar marchosi hag an anevaled landramus a c'hellas aveli o fenn ha lakaat o fri er-mêz. Tost da unan eus ar prenestrou edo korzenn kaoñ zeñg al lost-toenn ha dindani eur varikenn didal leun a zour.

Ne zaleas ket Yeunig ar Gow d'en em gavout e porz ar marchosi da heul kanfarted vihan ar vourc'h. Ne gredjont ket tostaat re, da genta, ouz an elefanted. A-benn ar fin, koulskoude, e kinnigas eur mous eun tamm bara da unan anezo hag hemañ, laouen an tamm anezañ, her c'hemeras gant beg e fri hag her c'hasas d'e c'henou. Neuze, o welout e oa doñv ha dizrouk an anevaled vras-se, e redas al lamponidi d'ar gêr da gerc'hat bara hag avalou da rei d'ezo hag, e-pad eur pennad mat, e chomjont sebezet-marzo da sellout penôs e tebrent.

Hogen unan eus ar voused, natur fall en e gorf, a sankas eur spilhenn en eun aval ha, goude, a roas ar frouezenn d'an elefant a oa an tosta d'ar varikennad dour. Broudet e voe genou an aneval pa yeas da chokat an aval. Ker-kent, eet droug ruz ennañ, e sellas a-gorn gant kasoni ouz al lampon bihan en devoa c'hoariet an dro divalo-se d'ezañ. Neuze e soubas penn e fri hir er varikenn didal a oa dindan korzenn an doenn ha, goude beza chachet gantañ kement ha ma c'helle eus ar pez a oa enni, e strifkas dour ouz ar c'hrennard, gant kement ta nerz, ma kouezas ar paour-kêzig a-stok e gorf war an douar ha ma ruilhas war ar porz evel eur voul-gilhou.

Re-bar d'eur vandennad yer dichouet diwar eur bern greun, e tilammas ar vugale-all, spontet ha strafuilhet, er-mêz eus porz ar marchosi, e-keit ha ma kendalc'he an elefant da deurel dour, evel eur stivell pe gentoc'h evel ar bomperien o stourm ouz an tan-gwall, ouz e enebour diskaret e-touez ar boultrenn eet da bri. Bewech ma klaske heman sevel war e dreid, e veze pilet didruez gant ar strifkadennou feuls e yee outañ. Pa voe skarz et ar varikennad dour e voe fin d'an abaden hag e c'hellas ar pôtrig dastum e gilhou hag en em ripa kuit, gleb-teil, badaouet ha mezek, dindan an hu a ree warnañ e genseurted o c'hoarzin goap d'ezañ...

YEUN AR GOW.



MERO'HER AL LUDU a 'n em gav, er bloaz-man, d'ar 18 a viz C'houevrer.
SUL FASK d'ar 5 a viz Ebrel.
SUL AR PANTEKOST d'ar 24 a viz Mae.

Bugale Vreiz o prezeg ar Feiz dre ar bed...

AR gelaouenn « Missi » a zo gouestlet d'ar misionou er broioù divadez. Niverenn miz Genver diweza a zo plijadurus kenañ da lenn d'eomp-ni Bretoned p'eo embannet evit renta enor d'al labour kaer graet gant hor c'henvroiz war dachenn an abostolerez.

War ar golo eo skeudennet Beg ar Raz gant rec'hier ha tarziou ; gronnet eo Breiz gant an hevelep-rec'hier hag an hevelep mor hag ar Breizad bihan en deus lezet e faltazi da redek... Petra 'zo en tu all d'ar mor bras ? Broioù nevez da welet... arc'hant da zastum... eneoù da c'hounit da Zoue. ...Hag eus eur c'hantved d'egile ar Vretoned o deus treuzet ar morioù doun : pesketarien, martoloded a vrezel, korserien, kenwerzourien, misionerien.

« Samm ho Kroaz santel war e skoaz
 Ar C'helt en deus graet tro ar bed... »

Met hirio ne vo ano ganeomp nemet eus ar visionerien.

War 12.000 beleg misioner a gonter dre ar bed 1.500 (42 eskob en o zouez) a zo ginidik eus a Vreiz.

Breiz a ro eta d'an Iliz unan war eiz eus he misionerien.

Breiz a zo anezi eul lodenn war 150 eus ar broioù a gas misionerien da brezeg ar Feiz ; ma vefe ker brokus ar broioù all e vefe n'eo ket 12.000 misioner eo, met 250.000.

Met lennit 'ta er gelaouenn « Missi » ar pennadoù skrivet gant Gwion ha Pol Rolland-Gwalc'h, Jezuiet ha Kapusin, an Tad Grovalet, Jezuiet, sikourët gant an Tadou Nicot, Guéguen, Jezuiet, an Tad Michel eus urz ar Spered Santel, an ao. Guizard, an ao. Despont, sekretour Breuriez ar Feiz e Pariz, ha sekretourien pemp eskopti Breiz.

Setu amañ eun daolenn hag a ziskouezo peger brokus eo Breiz pa vez kont da gas beleien en diavaez :

	KEMPER	GWENED	S'-BRIEG	AN NAONED	ROAZON	BREIZ
niver ar veleien :	2.199	1.630	1.282	1.399	1.947	8.457
o labourat						
en eskopti :	1.094	910	884	899	1.172	4.959
en diavaez :	1.105	720	398	500	775	3.498
en diavaez						
war gant :	50%	40%	33%	40%	40%	42%

Fouge a c'hell beza ennoomp, Bretoned, n'eus ket kalz a rabat ganeomp c'hoaz war dachenn ar misionou, eur merk difazi e chom beo ha nerzus ar feiz kristen en hon touez.

E-touez ar Vretoned aet da ober o annez pell diouz o bro, n'eo ket aet d'an hesk mammenn an abostolerez. E Kreisteiz ar Frañs, e eskopti Périgueux ez eus 450 tiegez Bretoned ; etre 1936 ha 1950 o deus roet 10 beleg d'an eskopti hag 8 d'ar relijiuzed. E-pad ar 14 vloaz-ze, ar Vretoned ha n'int nemet eul lodenn war gant eus tud an eskopti o deus roet 12% eus ar veleien nevez.

Arabat eo d'eomp kredi koulskoude hon defe ar renk kenta — marteze emaoomp da eil. En Izel-Vro (Hollande) ez eus war-dro 4 milion a gatoliked ha 3.229 beleg misioner. Breiz gant 3 milion a dud pe war-dro n'he deus nemet 1.500 beleg misioner. Laouen omp o welet broadou nevesoc'h ar feiz enno o tont d'hor pourchu ha zoken o vont en hor raok.

Seurezed misioner a zo ivez e Breiz. Er bloavezh 1869 an aotrou *Kardinal Lavigerie* a oa nec'het bras, ezomm en devoa seurezed da skoazella e visionerien. « *Seurezed misioner am eus ezomm, kit da gerc'het d'in da Vreiz* » effezañ d'eur beleg breizat. Eiz plac'h yaouank a respontas dioustu, diou anezo n'o devoa ket c'hoaz 16 vloaz. « Brao e vezo ar gont avat, a lavaras unan anezo, ma ne vez nemedomp-ni evit digeri an erol ! » Setu penaos e voe savet urz *seurezed-misioner an Afrig*. Ar superiorez genta a voe *Seurez Mari-Salomé*, ginidik eus à Wiseni.

V. F.



MORLARJEZ HA KORAIZ

Gwechall e veze striz ar yun hag ar vijil e-pad ar c'horaiz. E-keit ha ma pade an daou ugent devez hir-se a binijenn, ne weled morse tamm kig ebet war an dól ha dister e veze ar bevañs war ar marc'had. Soubenn wenn, yod kerc'h, yod ed-du, avalou-douar poaz-disec'h, bara segal ha krampouez sec'h larjezet gant avalou poaz, setu ar bouetaj a ranke an holl tremen gantañ.

Ne veze ket debret viou zoken, rak difennet e oa en em vaga ganto. Ker gwas pec'hed a vije bet d'hon tud koz, war o meno, dibri viou eget dibri yer. Ha perak ne vije ket, peogwir e tiglir ar re-mañ eus ar re-ze ?

Arabat, eta, beza souezet ma veze kavet kement a viou war ar mêt, pa veze deuet amzer Fask. Dont a reas neuze ar c'hiz da rei d'ar vugale, hag ive d'ar re vras, viou poazet kalet en dour bero ha livet gant bleuñ banal pe gant plusk ougnon. Bremañ c'hoaz e talc'her eun tammig d'ar c'hiz-se, met gant liou-skriva a gaver da breña er stalioù ispisiri e liver ar viou Pask e glaz, mouk, gwer pe ruz.

A-rôk ma kroge ar c'horaiz e veze chegenn pe chervad gant hon tud koz. Perak ive mirout keit-all an traou mat n'o devoa ket ôtre da zibri e-pad ar m'read-se hag a vije bet gouest da vont da goll ? Antronoz Meurz al Lard enañ Merc'her al Lodu ha diwar an deiz-se e ranked ober kovig moan.

E-pad Morlarjez e veze dañs, ebatou a bep seurt ha maskaradennoù ha, derc'hent Merc'her al Lodu, e weled ar re yaouank, sonerien d'o heul, o sam-mañ, en eur c'harr, peur pôtr koz-plouz, anvet ganto Sant al Lard, da gas da veuzi d'ar mor, d'ar ster pe d'eur poull bennak. Hag e kanent a-bouez penn, e-keit ha ma sone ar sonerien ton o c'hanaouenn :

*Sant al Lard ne deo ket maro
Sant al Lard ne varvo ket !*

Sonj hon eus c'hoaz eus eur son-all eus ar mare-se ive.

*Morlarje 'zo eur paotr gê !
Me 'garfe 'padfe bemde
Hag an eost diou wech er bloa
Ha Gouel Mikêl bep seiz vloa.*

N'eo ket gant eur perc'henn moarvat e voe savet ar son-se. Gant eur me-rour, avat, ne lavaran ket, rak da ouel Mikêl e vez pëet ar fermou er vro-mañ. Ha setu penôs e kemere hon tud koz eun tammig plijadur a-barz kregi a-galon vat gant pinijennou rust ar c'horaiz.

Yann ar Gwiader.

"Paotred ar sukr" hag an divroa e Breiz

○ tont emañ eus eun droiad hir a-dreuz bro ar betrabez-sukr en em led war eur pemzek departamant bennak e kreiz hag e nord ar Frañs, setu va spered debret gant darvoud an « divroa ».

Evit ar wech eo bet an « divroa » o suna pobl ar Vretoned, lavaret e vez « kleñved » an divroa, ha koulskoude n'eo ket eur c'hleñved eo a vefe silet en hor gwad, met kentoc'h eur merk eus nerz ar vuhez en hon tiegeziou. Kreski 'ra an dud e Breiz buanoc'h eget al labour hag ar binvidigez ; ret eo da lod eus he bungale kuitaat. Ar pobladoù yac'h ha kreñv ha yaouank eo lezenn o zud divroa, hag ar pobladoù o vont da goz er c'hontrol, hanter-zizec'het ganto mammenn ar vuhez eo o lezenn gervel diavaezidi war o sikour pe o lezel — dre gaer pe dre heg — da gemeret ar plasou goull o ziez.

Daoust da ze e vefe gwelloc'h mar gellfe douar Breiz rei labour ha boued d'e holl vugale hag e welomp gant levez eun strollad gwazed a-benn o klask an tu da zifenn ha da greski pinvidigeziou Breiz, n'eo ket avat o klemmichañ pe o kana gwerziou met oc'h urzia pinvidigeziou hor bro. Ano ar strollad-se eo ar C.E.L.I.B. (1) (Comité d'Etude et de Liaison des Intérêts Bretons). En e benn emañ R. Pléven ha P. Ihuel, ha d'o heul an darn-vuia eus kannaded Breiz e Breujoù Frañs hag eun niver bras a bennadureziou a bep seurt. D'an 30 a viz Even 1952 ez eus bet e Gwenad eur vodadenn a-bouez : « Ar wech kenta eo, a lavaras P. Ihuel, rener kuzul-departemant ar Morbihan, eil-rener ar C.E.L.I.B., da welet bodet asambles tud a bep seurt menoz politikel o klask an doare da zifenn ha da rei lusk da binvidigeziou Breiz ». N'eo ket mank a labour a vefe d'ar Vretoned e Breiz ma karfed. Fiziañ hon eus e ray labour vat ar strollad-se. Hevelep strolladoù a zo bet savet e rann-vroioù all er Frañs, met strollas Breiz eo a ya ar gwella en-dro, hervez ar pez a lavaras an Ao. Pléven e ti-kêr Landreger, da geñver ar Bleun-Brug.

Divroa a ra lod eus ar Vretoned evit o buhez pad war-zu ar c'hêrioù bras, met, pa vezont deuet koz e plij ganto dont da echui o amzer e bro o yaouan-kiz. Setu aze gwazed — ha merc'hed ivez — e-keit ha ma n'hellont ket gounit e vezont savet ha maget e Breiz, bloaveziou o brud hag o nerz a dremenont er c'hêrioù — binvijoù labour ha ne deuont ket da ger d'ar c'hêrioù ! — ha goudeze, pa n'hellont mui gounit e teuont adarre da c'houlenn digant maeziou Breiz bod ha boued. N'ouzon ket ha dalc'het e vez kont a-walc'h eur kement-se gant al lezennou.

Eun « divroa » all a zo ha na bad nemet gant ar mizou goañv. Eus a viz Here da viz Genver, 12.000 Breizad pe war-dro, hervez ma 'z eus bet embannet, a ya war ar sukr ha war ar betrabez. Setu aze eur c'hleñved neuze !

Devezourien, micherourien, tiegeien gant atañchoù bihan, atañchoù re vihan ha re dreut, n'o deus taol labour ebet kouls lavaret da ober er gêr e-pad ar goañv. Komprenit 'ta ez eus, netra nemet e parrez Rozko, 163 atant pe gêr en-tu-mañ da zaou zervez arat douar ! Deuet miz Here, tennet an avalou-douar, gwerzet an ognon, dibennet an atrichaot, ar brikoli n'emaint ket c'hoaz e boued, n'eus netra da ober da c'hortoz miz Genver, nemet entent ouz eur vloc'h pe ziou, labour a-walc'h marteze d'ar re fall — merc'hed ha krennarded — ; ar wazed a yelo da werza ognon da Vreiz-Veur (war-dro 400) pe war ar betrabez hag ar sukr er broioù krec'h (600 bennak ha tro-war-dro).

Tri beleg a zo bet er bloaz-mañ o welet paotred ar sukr, tremenet int e 12 uzin ingalet war 12 departamant.

Plijadur bras o deus graet d'ar vicherourien divroet. Bemdez diouz an noz e veze sinema ha tud ar vro ivez a veze pedet da zont. Peseurt skeudennou a zo bet diskouezet ? Traou eus ar re gaera : Gouelioù bras Bro-Gerne e Kem-

(1) Ar C.E.L.I.B. a embann bep miz eur gazetenn : *La Vie Bretonne*, 18, rue d'Enghien, Paris (10^e). 200 lur ar bloaz.

per, Kendalc'hioù ar Bleun-Brug e Kastell, Landreger, Baod (Morbihan), Ponte-Kroaz ha Plougerne, pardon bras Santez Anna ar Palud, Bizinerien Plouneour Tréz, skeudennou a liou gant hor bro, hon ilizou, hor gwiskamafichou, hon dañsou, eilet gant sonerez ar vombar hag ar biniou... Tud ar vro a zispourbelle o daoulagad, kredit ac'hanoun ! Biskoaz n'o defe kredet e vefe bet ker kaer hor Breiz. Hag ar Vretoned, skuiz gant aul labour pounner, a zave sounn o fenn hag a zigore o bruched leun a lorc'h. Hag e veze kanet gant Paotr Treoure (an Ao. Cong, Doue d'e bardono !) a vo bet evit frealzi ar Vretoned divroet

« Ni 'zo divroet, o mamm vat
Deut eus a Vreiz da labourat... »


« Paotred ar sukr, kanomp eur zon
Evit laouenaat hor c'halon... »

Diouz ar mintin e veze oferenn evit anaon kerent paotred ar sukr. Frommus oa evit an holl — dreist holl evit beleien ar parrezioù-ze — gwellet gwazed, micherourien disprizet re alies, mesket gant Spagnoled, Nord-Afrikaned, o kana kantikou hag o pedi, hag o kommunia leun a feiz evel bugale.

Nemet n'hell ket padout an abadenn-ze. Aes eo lavaret mont war ar sukr, met kalet eo ar vicher ha paeet fall, kalet eo lezel er gêr gwreg ha bugale ; kalet eo kousket war ar c'holo pe kouls lavaret war ar c'hoad. Kalet eo sevel e-kreiz an noz da gregi el labour. Kalet eo beza dizounet eus gouelioù kaer hor parrezioù. Kalet eo gwelet an dervezioù o tremen hap na vefe kemm ebet er vuhez pa zigouez ar zul ha pa n'heller kaout tamm oferenn ebet da zul nemet dre laer e vefe sulveziennou zo. Kizidikoc'h eget e sonjer eo kalonou an dud keiz-se. Pa glevjod er sinema kleier ar Folgoad o sini : « O ! ar c'hleier, eme unan, amañ ne glever morse ar c'hleier o sini nemet boudalenn an uzin ouz hor gervel ! Kaer eo ar c'hleier ! »

Piou a roio labour d'ar Vretoned e Breiz epad ar goañv ?

V. F.



Paotred ar sukr hag o mekanikou.

Eur c'hantik en enor da Sant Maodez

War hon eus klevet emañ an Ao. Guillou, person Lennon, hag an Ao. Hamon, m'er ar barrez-se, o lakaat dresa a-nevez chapel gaer an Noc'h-Gwenn, gouestlet d'an Itron Varia a Gelou Mat, e-lec'h ma enorer ivez unan eus hor brasa Sent koz, Sant Maodez pe Mode, evel ma vez lavaret e Kerne.

Ra vezo trugarekaet an Ao. Ao. Guillou hag Hamon ha ra gouezo puilh warno bennoz ar Werc'hez ha Sant Maodez !

Ano a zo da lida eur gouel kaer e chapel an Noc'h-Gwenn kerkent ha ma vezo echu al labour warni.

Setu amañ ar c'hantik nevez a zo da veza kanet gant Lennoniz hag ar bardonerien-all en em gavo niverus eno en deiz-se :

An diskan 'zo war eun ton keltiek, hini kantik treizidi an « Titanic » : Me gred ennout, Ma Doue ; e galleg : Je crois en toi, mon Dieu.

Ar pozioù 'zo war don Patronez dous ar Folgoad.
Ne vo kanet an diskan nemet diou wech, a-rôc ha war-lerc'h ar c'hantik.

DISKAN :

Sant Mode, mignon mat,
Skoazell hon bro,
Pedit Doue, hon Tad,
M'hon divoallo,
Ma vo parrez Lennon
Post atô d'E galon
Ha ma vimp da Zoue
Gwir rugale.

I

Sant Mode, sant benniget,
Ken bras atô e vrud,
Kalz a-rôc ma voe ganet
'Voe gouestlet gant e dud
Da Zoue, hon gwir otrou,
Hon mestr ker hag hon tad,
Da vont 'harz E ôterioù
D'E zervicha ervat.

II

E dad, roue Iwerzon,
Dek mab en devoa bet.
Met a-greiz holl e galon
'Voe goasket start meurbet
Pa gollas nao anezo,
Diskaret 'kreiz o brud
Ha sammet, siouaz d'ezo !
Gant eun droug kri ha yud.

III

Sant Mode, dre al lezenn,
Susitour 'oa d'e dad
Da c'houarn an enezenn
Pa vije deut en oad.
Eur briñsez a voe klasket,
Eur plac'h kaer hag a don,
Da roi d'ezañ da bried
'Barz pignat war an tron.

IV

Eur pried eus an douar
Ne felle ket d'ar zant :
Mari, hon mestrez klouar,
A oa bepred e c'hoant.
Ha, setu war e bedenn,
Ma teuas, 'n eun töl-kont,
Goradou leiz e groc'henn
Ken a voe eur gwir spont.

V

Da c'houde ' voe beleget
Ha setu heñ da Vreiz
Da skigna, gant kalz aked,
Gwirioneou ar feiz,
Ha dirak hon c'hentadou,
Souezet-bras meurhet,
E reas kalz burzudou
Keit ma voe war ar bed.

VI

Sant Tual a Landreger,
Ken karet 'barz ar vro,
En devoe outañ preder
Ha neuze, tro-war-dro,
Da brezeg d'ar Vretoned
E kasas prim hon zant.
Kalz en deus sklerijennet :
N'ouzon pet mil ha kant.

VII

Da veva da Lanvode
E ya, skuiz gant an trouz ;
Met an dud en em vode
En dro d'e lochenn blouz.
Ha neuze, d'eun enezig
Leun a aered, e tec'h ;
Eno al lōned euzik
'N eus lac'het holl hep nec'h.



Ar Vretoned hag ar brezoneg

Kalz eus ar Vretoned a soñj d'ezo n'eo mat ar brezoneg da netra hag e reont fae warnan. War o meno ne dalvez ket muioc'h eget ar meubl koz a vez lakeet, e korn al leuriou, d'ober lochou lapined, pe c'hoaz brageier bras ha bodreou o zadou koz pe broziou kala-goañv o mammou kuñv. Ne welont ket eo ar brezoneg lavar pemdeziek ouspenn eur milion a dud, tud eus o gouenn hag a dalvez kerkoulz hag eur milion a dud-all. Setu ma kredont eo eun dizenor d'ezo komz o yez pe o langaj o-unan ouz o bugale, ha ma vezont klevet o c'hallega, par ma c'hellont, ouz ar re-mañ gant aon da dremen evit tud diwezat ha droch ; Ha petra a weler neuze alies e tiegeziou 'zo ? Tadou ha mammou koz divarrek da ranna kaoz gant o bugale vihan ha bugale yaou-ank ha n'int ket evit entent savar o zud koz. Eun druez hag eur vez !

Ha peurvuia ar galleg a glever gant ar re yaouank ne vez nemet hini dister, eus ar seurt a vez gant lamponidi ar c'hêriou bras, disheñvel-krenn diouz hini al leoriou. Koulskoude, ma komz Bretoned 'zo galleg ouz o bugale, eo abalamour me kredont e vo êsoc'h d'ar re-mañ studia al langaj-se pa 'z aint d'ar skol.

VIII

Roet 'n eus ive ar vuhe
Da vañ eun otrou meur
'Ooa lac'het, pebez true !
O c'hoari gant e vreur.
War-lerc'h ar seurt burzudou
'Voe karet gant an holl
Ha brudet-bras, ma zudou,
Er vro-mañ ha dre-holl.

IX

'N eur c'heo dindan an douar
E varvas hon zant mat
A-barz mont d'al lec'h klouar,
Da varadoz hon Tad.
'Rôk mervel, pebez dudi !
'Savas eur chapel goant
Gant Botmael ha gant Tudi
A oa ive daou zant.

X

Enoret eo e Lennon
Sant Mode en Nac'h-Gwenn,
Eur chapel tost d'hon c'halon
'Lec'h 'ma ar Wer'hez Wenn
O roi d'he farrezioniz
Skoazell ha « kelou mat ».
Dreizo Doue, Lennoniz.
Hon digemero mat.

Hogen aze emañ ar fazi a reont, rak pell 'zo bet prouet e teu peurvuia ar vugale o devez desket ar brezoneg war barienn o mam da veza gouizie-koc'h war ar galleg eget ar re n'o devez bet klevet gant o zud nemet ar yez-mañ. Ha n'eo ket ret beza souezet gant eur seurt tra o veza ma oar ar vrezonegerien a-vihanik eul lavar hag a c'hellont keñveria outañ al langaj nevez a vezont o teski, ar pezh n'eo ket gouest ar c'hallegerien vihan d'ober.

Ouspenn, hag an dra-mañ eo ar pouezusa, arabat kaout mez beza Bretoned. Ha pe hini eo ar merk anata da ziskouez ez omp eus ar ouenn-dud-se, nemet ar brezoneg a zeu eus hor genou ?

Komzomp brezoneg eta ouz hor c'henvroiz ha, dreist-holl, ouz hor bugale. Deskomp d'ezo kaout doujañs ha karantez evitañ.

Yann ar Gwiader.



LONKA AR C'HAZ

Bez ez oa, eur wech, eur medisin, an aotrou Kergoat, e ano.

Eur medisin mat en doa brud da veza, hag, e gwirionez, ne veze morse nec'het gant klenved ebet. Ne jome morse bout.

Eun nozvez m'edo kousket mik en e wele, an ao. Kergoat a voe dihunet soudan gant taoliou pounner skoet war e zor : Petra zo ? Piou a zo aze d'an eur-man ? a youc'has eus e welc.

— Fanch ar Born, eme ar vouez : « Deut buan, deut founnus, aotrou medecin, betek du-hont, rak va mestr a zo gwali dalc'het... Ne zaleit ket en 'an Doue. »

— Peoc'h d'in, eme an ao. Kergoat ha n'ez ez ket da derri va dor ha va fenn d'in, evel ma rez. Ar vedesined, entent, o deus ezoumm da gousket evel an dud all. Kerz buan d'ar gêr alese, ha lavar d'az mestr ec'h en em gavin warc'hoaz vintin, kerkent ha goulou-deiz.

Met Fanch ar Born ne gleve ket gant ar skouarn-se hag a gendalc'he da lopa gwasoc'h-gwas.

— N'ez in ket ac'halen, va unan. Dont a rankit ganen, aotrou Kergoat. Ne lezin peoc'h ebet ganeoc'h, la...

— Met petra c'hoari gant da vestr, eme an ao. Kergoat, kounnaret... Petra c'hoari gantan, peseurt klenved en deus ?

— Peseurt klenved, peseurt klenved en deus, daoust ha me oar-me. M'am bije gouezet, moarvat ne vijen ket deuet aman.

— E pelec'h en deus poan, ma kavez gwelloc'h, tamm amboubal zo ac'ha-nout !

— E poull e galon, aotrou medecin. Abaoue e gousk-kreizteiz, hirio, e penn ar bern kolo, eo kroget ennan eur boan iskiz. Me gredfe a-walc'h en deus lonket eul logodenn veo.

— Hag e teuez aman, d'ar poent-man, en noz, da glask ar medecin, pezh panezenn ma z'out ! Entent mat ganen, pegwir da vestr en deus lonket eul logodenn veo, lavar d'ezan eus va ferz lonka ar c'haz, ha lez an dud onest da gousket e peoc'h.

KORN AL LIZIRI

Setu darn eus eul lizer bet kaset d'eomp gant eur beleg breizat, an Tad Quinquits, O. M. I., mistoner en Afrika ar C'hreisteiz, abaoe 52 vloaz.

«...Bennoz Doue deoc'h evit ar c'homzou kaer ha kalonek ho peus skrivet war gelaouenn ar Bleun-Brug, e miz Kerzu diweza, diwar-benn an Aotrou Perrot. Anavezet mat em eus anezañ, peogwir hon daou omp bet savet er memes parrez, e Lok-Maria-Plouzane, skoliet e Pont-e-Kroaz hag e kloedri Kemper. Ma c'hellan c'hoaz hirio komz eun tamm brezonek eo abalamour oun bet eur mignon bras d'an aotrou Perrot ha va brasa plijadur a oa lenn « Feiz-ha-Breiz ». Daoust hag ez eus eun den e Breiz-Izel hag en deus poaniet evel an ao. Perrot evit delc'her ar brezoneg en e za ? N'her gredan ket. Hag abalamour da ze kement Breizad a dlefe epad e vuhez delc'her sonj anezañ. Evit kement-se perak ne c'hellfomp ket sevel war e vez n'eo ket eur groazig koat met eur groaz dereat evel ar re a zo savet evit hor Soudarded maro er brezel ? Ya, dalc'homp sonj eus an ao. Perrot hag eus barr an neñv ar beleg santel-ze a gendalc'h da stourm evel m'en deus graet e-pad e vuhez evit ma chomo Breiz-Izel en he za gant banniel ar Bleun-Brug. »

Setu darn eus eul lizer kaset deomp gant eur Breizad, mestr-skol en Normandi.

Dans cette région, il y a beaucoup de Bretons, et dimanche dernier nous avons eu la grande joie, grâce à l'aumônier des Bretons de Rouen, de pouvoir célébrer un pardon breton : c'était très émouvant d'entendre chanter les vieux cantiques de chez nous, « Kantik ar Baradoz », « Patronez dous ar Folgoët » et l'Angelus en breton ; et après les vêpres chantés sur les tons des Pardons bien sûr, les Korellerien Breiz-Izel ont donnés une aubade.

Des amis voisins, Bretons du Léon et de Cornouaille, me chargent de vous demander, si vous pourriez indiquer l'adresse d'un fournisseur de chapeaux et de costumes bretons, car les jours de fêtes les hommes mettent leurs chapeaux et les femmes leurs beaux costumes.



Meulgan ar C'homplidoù

Araok ma echuo an deiz
Hoc'h aspedomp, krouer an traoù,
Da reiñ d'imp en ho trugarez
Difenn ha gwarez ho krasoù.

Ra gilo pell ar gwall-huñvre
Hag ar faltazi amzere
Argasit mat hon enebour
Na vezo ket ar c'horf loudour.

Hor selaouit, Tad truezus
Ha c'hwi e Vab madeleus
A ren gant ar Spered Santel
En hevelep (en ur memes) klod peurbadel.⁽¹⁾

Evelse bezet graet.

(1) Gloar eternal.



KELEIER

E kermess Landevenneg, e miz Gouere diweza, ez eus ket gwerzet war-dro 150.000 lur leoriou brezonek.

E Kemper ez eus eur stal o werza ouspenn 400 leor brezonek bep bloaz.

Leziregez ar Vretoned a zo kiriek da varo ar gelaouennig brezonek « *Ar Glazig* » a zo bet embannet e-pad eur bloavezh gant brezonegerien galonek Sant-Brieg, an aotrounez Pichouren hag A. an Diuzet. N'eo ket kalz dru-zoc'h an traoù gant *Bleun-Brug*. Ma fell deoc'h ma vezo hor c'helaouenn, na c'hortozit ket evit kas d'eomp ho koutmanant, ha klaskit d'eomp koutmanantierien nevez.

Unan eus peziou-c'hoari Roparz Hemon, *Meurlarjez* a zo bet lakaet e yez Bro-Friz ha moulet nevez zo e stumm eul leor.

Gwall-ziaes eo d'ar vistri-skol laïk kelenn ar brezonek d'o skolidi dre ziouer a leoriou. *Oberenn al leoriou-skol brezonek*, hag a oa bet krouet evit dastum arc'hant hag embann leoriou, he deus ranket paouez, e veza ma tispigne muioc'h eget na oa roet d'ez. Dever holl vignoned ar brezoneg eo dont war zikour an dud kalonek-se en eur gas o frofou da :

Groupe ar Falz : B. P. 19, Brest, — C.C.P. 430-20, Rennes.

Plijusoc'h-plijusa eo « *Ar Soner* », kelaouenn « Bodadeg ar Zonerien » ha « *Kendalc'h* ». Pennadou dudiuz ha kentelius a vez kavet enni, keleier a-bep seurt, barzonegou kaer Per Helias, ra diwar dourn Per Helias ivez e oa eur gontadenn dispar en niverenn miz Genver. Koutmanantit holl d' *Ar Soner*. An arc'hant (500 lur bep bloaz) a zo da gas da :

Hervé LE MEUR, B. P. 25, Quimper, — C.C.P. 56-64 Rennes.

E meur o voula eul leor nevez : « *Les costumes des populations bretonnes* » gant R.-Y. Kreston, raskrid gant P.-R. Giot. Al leor-mañ, frouez a 30 vloaz a labour a vo embannet e lodenn genta, war-dro 100 pajenn enni, e derou ar bloaz-mañ. Rakprena anezañ a c'heller betek an dibenn a viz Meurzh : 500-lur franco :

C.C.P. 9405-32, *Musées préhistoriques, rue du Thabor, Rennes.*

Levriou bihan e brezoneg eeun a vez moulet alies a-walc'h. Goulenn anezo digant

Y. TYMEN, 30, rue de la Résistance, Quiney-sous-Senart (S.-et-O.),
C.C.P. 572-325 Paris.

Ouspenn 300 leor a vez moulet bep bloaz en islandeg, yez komzet gant 140.000 a dud hepken. Hag e brezoneg ?

VA ZI BIHAN

*En envor da Baotr Treoure e lakomp aman unan eus e ganaouennou kaera,
unan eus ar re a garie kana gant kement a galon.*




A bep tu em eus re-det, da glask an eñ-rus-ted, da glask



la-bour, Da c'hou nit va ba-ra. Met d'ar gêr pa zis-tro-an, Em




c'ha-lon e tan-van ar bli - ja-dur, al le-ve-nez vra-sa Pa deu



'n a-vel da c'houe-za ar mor da eo nen-na, Pa zi-roll an holl drou-gou er




go-anv, O nag eo du-di-us chom er gou-dor, e - vu-rus, En



va zi bi-han ka-ran - te-zus.

—: DISKAN :—



O! me da gar, ti va za-dou, Mui - oc'h e - get an holl den-ze-riou



Kar-get ra-ouen a skle-ri-jenn, Ti koz, te zo 'vel eur ba-ra-doz.

||

Ro digemer d'ar bugel
Dizroet d'e gavel,
Ro d'in nerz, deus da floura va c'halon !
Me wel aze, dem-guzet,
Va c'hadorig vourret
He divrec'h astennet warzu ennon.
An orolaj o seni
A sko 'vel kaniri
Hag a laka va gwad holl da virvi.
O ! va zi benniget
Da vousec'hoarzou entanet
A laka da dridal va spered.